

D'an 19 a viz Here

- War-dro ar bloaz 160, e Roma, merzherenti ar sent Ptoleme ha Lucius. Da vare heskinadeg Antonin an Deol e voe flatret ar C'hristen Ptoleme gant karantez dilezet ur vaouez diroll en doa gounezet d'ar C'Hrist. Barnet d'ar marv edod ouzh e gas da lec'h an andishadur pa zegouezhas ur c'hristen all, Lucius, a c'halvas war ar barnour evit diskuliañ direizhded ar varnedigezh. Neuze e voe kaset war un dro gant Ptoleme da vezañ lazhet eñ ivez.
- E 307, en Egipt, merzherenti sant Varus. Soudard e oa da vare an impalaer Maximianus. Tra m'edo o weladenniñ hag o frealziñ c'hwec'h penitiour karc'hariet en abeg d'o feiz e tivizas kemer lec'h ur seizhvet a oa marvet er gouelec'h. Neuze e voe jahinet kriz ha lazhet.
- E 307, en Egipt, merzherenti santez Kleopâtra. Intañvez genidik eus Palestina en em ouestle da skoazellañ tiegezhioù ar verzherion. Sebeliet he doa korf sant Varus hag hemañ en em ziskouezas dezhi pa varvas he mab da zeiz dedi an iliz gouestlet d'ar merzher. Merzheriet e voe d'he zro avat en abeg d'he feiz.
- Goude 589, sant Veran (Gl. Véran pe Vrain), eskob Cavaillon. Leun a zonezonoù e oa, pergen evit frealziñ a re glañv.
- E 720, santez Frideswid, gwerc'hez e Bro-Saoz. Diazezañ ha gouarn a reas ur manati daouel, unan evit manac'hezed hag unan evit menec'h e Thorbury. Sebeliet e voe en Oxford ma'z eo paeronez ar Skol-Veur.
- D'an hevelep deiz, merzherion ar C'Hanada, bet lazhet etre 1642 ha 1649, an holl anezho izili pe "roidi" eus Keneilezh Jezuz ha genidik eus Bro-C'hall: An Tad Izaag Jogues, genidik eus Orléans, a c'houzañvas ar verzherenti e 1646 e bro an Irokoaied e-kichen Auriesville, bremañ Stad New-York; araozañ, e 1642, e oa bet lazhet René Goupil eus eskobiezh Anjev, mezeg a genlaboure gantañ; Jean de la Lande, kenlabourer ar Jezuisted genidik eus Dieppe lazhet e 1646; an Tad Jean de Bréboeuf, eus Normandia, a voe lazhet e 1649 e bro an Huroned, e-lec'h m'emañ ar C'hanada; an Tad Antoine Daniel, genidik eus Dieppe, lazhet e 1648; an Tad Gabriel Lallemant eus Paris lazhet e 1649; an Tad Charles Garnier eus Paris lazhet e 1649; an Tad Noël Chabanel, genidik eus Saugues er Gevaodan lazhet e 1649.
- E 1694, ar wenvidigez Oanez a Jezuz, gwerc'hez, leanez eus Urzh ar Brezegennerion e kouent Langeac e Bro-Alvern e Bro-C'Hall. Skedus dre he c'harantez c'hredus evit an Iliz hag he fastored, e voe grataet dezhi radoù kevrinel liesseurt.
- E 1775, e Roma, sant Paol ar Groaz, beleg, diazezour ar bPasionisted pe Diouzañvourion. Goude un nebeud bloavezhioù en digenvez e krogas da ziazezañ un urzh galvet da vezañ test eus follentez ar Groaz en ur c'hantved ma rene an amgredoni ennañ.
- E 1984 e Varsovia, merzherenti ar gwenvidig Jerzy Popiełuszko, beleg. Aluzenner ar c'hweluniad Solidarność e oa pa voe drouklazhet d'e 37 bloaz war urzh ar gouarnamant komunour.
- E Breizh, er VIvet kantved, sant Gwennolev ar Yaouaer, abad Taorieg.
- E 613, sant Ezhvin (Lt. Ethbinus, Gg. Ethbin, Elbin), manac'h, diagon. Diagonet e vije bet gant sant Samzun hag e vije bet manac'h e Taorieg da vare sant Gwennolev ar Yaouer. Kemmesket eo bet e vuhez gant hini sant Iduned.
- Sant Crionan (Krinan), den santel en Iwerzhon.

D'an 20 a viz Here

- Er Iañ kantved, sant Kornelius, kantener roman badezet gant sant Pêr e Kaezarea Palestina lec'h ma voe eskob, preveudi Iliz ar broadoù.
- E 363, merzherenti sant Artemioz, gouarnour milourel Aleksandria da vare Kustentin, harzet da vare Juluan an Dianzavour a oa distro d'ar baganiezh. Skoet ha bazhataet, e voe jahinet e meur a zoare a-raok bezañ dibennet. Kehelet e vez en ilizoù maronek ha kopt dindan anv sant Shatilla.
- E 1125, ar wenvidigez Adelina, abadez gentañ an Itronezed Gwenn diazezet gant sant Gwilherm e Mortain, c'hoar sant Vital, abad Savigny.
- E Breizh, en VIIIvet kantved, sant Herbod pe Haerbaod (Lt. Herbaudus), penitiour. Gwarezour

ar chatal korn. Bet ganet war enez Vreizh e teuas da vevañ e Berrien hag e Plounevez-ar-Faou er Paouc'hêr lec'h ma varvas.

- Sant MaolEoin (MaelYann), eskob en Iwerzhon.

- Er bloaz 730, sant Vital, eskob Salzbouurg. Ganet en Iwerzhon e voe diskibl sant Ruperzh hag e voe dibabet evit e warlerc'hiañ. Gounit a reas d'ar feiz pobl Pinger.

D'an 21 a viz Here

- War-dro ar bloaz 300, ganedigezh en neñvoù sant Severin, eskob Trier, eskobiezh koshañ Germania.

- War-dro ar bloaz 371, distro da Zoue ene sant Hilarion, war-dro, abad, tad ar vanac'helezh e Palestina. Ganet e-tal Gaza e Bro-bPalestina e voe desavet ha badezet en Aleksandria. Diskibl e voe da sant Anton er gouelec'h a-raok mont da ren ur vuhez penitiour en e vro c'henidik.

- War-dro 390, en Egipt, sant Viator. Hag eñ lenner en iliz-veur Lugdunon (Lyon) e heulias e eskob sant Just e gouelec'h an Egipt lec'h ma varvas. O relegoù a voe degaset en-dro da Lugdunon.

- Er Vvet kantved, santez Selina, gwerc'hez, diskiblez santez Jenovefa e Lutesia.

- Er Vvet kantved, santez Selina, mamm sant Remi eskob Reims ha sant Principius, eskob Soissons.

- E 1922, e Madeira, ganedigezh en neñvoù ar gwenvidig Karl Aostria. Hag eñ niz bihan an impalaer Frañsez-Jozef e pignas war ar gador-veur war e-lerc'h e 1916. Strivañ a reas da lakaat ar brezel da baouez o vont gant mennadoù ar pab Benead XV. Harluet e Madeira en 1918 e varvas eno en dienez. Lidet e vez da zeiz e eured gant ar briñsez Zita a vBourbon-Parme.

- E 383, e Kolun, merzherenti santez Ursula, gwerc'hez, hag e c'heneilezed. Hervez hengoun Breizh e oa Ursula merc'h Dinod Meur, roue e Kernev-Veur, hag e oa bet goulennet e dimeziñ gant ar penntiern Konan Meriadeg. Hemañ a oa deuet d'an Arvorig e penn 130 000 Breizhad. Dont a reas Ursula davetañ e penn ur bagad niverus a vaouezed mennet ivez da vont d'an Arvorig. Lod anezho o vezañ dimezet a zeue da gaout en-dro o fried. Tapet en ur gorventenn e voent kaset betek beg ar Roen ha lazhadeg e Kolun dre ma nac'hjont mont gant paotred bagan ar vro. Ouzhpenn santez Ursula e keheler lod eus he c'heneilezed e Breizh : ar santezed Gwennguniv, Tunvez, Antonia, Aorelia, h.a... hag ivez ur beleg a oa ganto, sant Yuvad, en deus roet e anv marteze da barrez Sant-Yuzad (St-Juvat) er Poudouvr, en eskopti Sant-Maloù.

- E Breizh, er Vvet kantved, sant Konogan pe Gwenegan, eskob Kemper. Ganet e vefe nepell diouzh Landerne, er Palud, war ribl an Elorn, lec'h ma roas e anv da barrez Beuzit-Konogan. Mont a reas da vanac'h e Landevenneg a-raok bezañ diuzet da eskob Kernev war-lerc'h sant Kaourintin.

- Er VIvet kantved, sant Judual pe Yuzwal (Lt. Iudualus), roue Devnon (Domnonea), tad sant Judael ha marteze tad sant Budog eskob Dol. Trec'h e voe war gKonveur lec'h m'emañ abati ar Releg e Plouneour-Menez, o tegeriñ ur prantad a beoc'h e dibenn mare divroadeg ar Vretoned.

- Sant Monna, abad-eskob e Kernev.

- E 635, sant Fionntan, abad. Hag eñ diskibl sant Koulmkell en enez Iona e savas abati Tachmon en Iwerzhon.

- E Naoned, Treuzlec'h relegoù ar sent Donasian ha Rogasian. D'an 22 a viz Here- Er Iañ kantved, santez Mari Salome, ar "berlouzaouerez", diskiblez an Arloz. Hevez hengoun an trinubium e vefe ganet eus trede dimeziñ santez Anna gant Salome. Dimezet gant Zebedeia, anavezet evel sant Aristoboul pe Arouestl, e c'hanas sant Yann ha sant Jakez Major. Gant hemañ e vije deuet da Vreizh ha da c'houde e vefe marvet e Verona, d'ar 24 a viz Mae 42 d'he 90 bloaz.

- E 303, en Adrianopl e Roumelia, merzherenti ar sent Fulub, eskob Heracle, Sever, beleg, ha Hermez, diagon. Lakaet e voe an harz warno gant ar pennadirezhioù roman dre m'edont bodet evit lidañ deiz an Aotroù. Kondaonet e voent da vezañ dêvet ez vev.

- E 314, sant Maelon (Kb. Maelon pe Maelan), kentañ eskob *Rodomagos* (Rouen), ganet e Kerdiz (Caerdydd), avieler bro ar Galeted (Caux), marvet e Héricourt-en-Caux.

- E 851, e Huesca en Aragon, merzherenti santez Elodia (Gl. Elodie) hag he c'hoar santez Nunilo, ganet eus ur vamm gristen hag un tad muzulmat, dibennet o div, reuziadezed ar charia.

- E 2005, e Roma, distro da Zoue sant Yann-Baol II, ganet Karol Józef Wojtyła e Krakovia, pab. A-hed tost da 27 bloaz e pleustras gwaziadezh Pêr gant ur spered kiminiadiñ didrec'hus douget gant preder pastorel an holl Ilizoù hag ar garitez evit Mab-den desellet en e leunded. D'an 20 a viz Gwengolo 1996, e Santez-Anna-Wened, da geñver e weladenn e Breizh, e tistagas e brezhoneg komzoù kemennadenn santez Anna da Iwan Nikolazig hag e c'halvas ar Vretoned da chom stag d'o sevenadur. Marvet eo d'an 2 a viz Ebrel 2005, derc'hent Sul an Drugarez bet desezet gantañ diwar gemennoù hor Salver d'ar Bolonadez c'hoar Foastina Kowalska en doa santelezet e miz Ebrel 2000.
- E Breizh, e 731, sant Moran pe Moderan, eskob Roazhon. Mont a reas da birc'hirinañ war vez an Ebestel e Roma hag e c'houlenas bezañ disammet eus e garg. Mervel a reas e manati Berzetto en eskobiezh Parma.
- War-dro 845, sant Benead Merzhered. Ganet e Patras e Bro-C'hres, e teuas betek an Arvorig war un dro gant e c'hoar santez Aven (Avenia) ha nav c'heneil. Degemeret e voe gant Alan, eskob Naoned, hag e savas ur manati e Merzhered.
- War-dro 875, sant Donat pe Donngus (Donnost) pe Donat Skot, eskob. Manac'h iwerzhonat, breur sant Andras (kv. 22/08), aet da birc'hirinañ da Roma, e voe dilennet eskob Fiesole. Desket-meurbet ha deol kenañ e labouras e-doug seizh vloaz ha daou ugent da adsevel Bro-dToscana bet diberc'hennet gant an Normaned hag an impalaered. Miret e vez e relegoù eno.

D'an 23 a viz Here

- Er IVre kantved, ganedigezh en neñvoù sant Petronios, abad en Egipt. O sachañ war e-lerc'h kerent ha mignoned e kuitas ar bed evit mont da heul sant Pakom. Dezanvet d'e warlerc'hiañ ne renas nemet un nebeud devezhioù kent mervel d'e dro.
- E 524, e Ticinum (hiziv Pavia) e Lombardia, merzherenti sant Severin Boethius, prederour ha doueonour. Ganet en un tiegezh brientinion eus Roma e reas e studioù en Aten hag en Aleksandria hag e voe anvet e voe koñsul gant ar roue Teodorig. Skrivañ a reas meur a oberenn en o zouez pleustradoù a zoueoniezh, a sonerezh, a niveroniezh. Teodorig avat, gonezet da gredenou Arianus, e lakaas er c'harc'har lec'h ma skrivas c'hoazh De consolatione philosophiae a-raok bezañ lazhet.
- War-dro 714, e Romsey e Bro-Saoz, santez Elfleda pe Edifleda pe c'hoazh Elgiva. Merc'h Oswy, roue Norzumbria e voe desavet gant santez Hilda hag e voe war he lerc'h abadez Whitby lec'h ma tegemeras sant Trumwin. Lakaat a reas sant Wilfrid ha sant Teodor d'en em adunaniñ.
- E 1456, e Kêr-Villackun e Kroatia, sant Yann a gKapistrano, beleg, Patrom aluzenerion al lu. Ganet eo e 1386 e rannvro an Abruzzo e rouantelezh Napoli, ez eas, goude marv e bried, da vreur minor. Strivañ a reas da adsevel ar genurzh e-touez ar Vreudeur ha dre e visionoù en Europa e labouras da startaat unaniezh an Iliz ha da wareziñ ar gristeniezh diouzh an Islam. Brevet gant e labourioù e varvas e 1456 e kouent Ujlak e Kroatia a oa d'ar mare-se e rouantelezh Hungaria.
- E 1680, e York e Bro-Saoz, merzherenti ar gwenvidig Thomas Thwing, beleg. Tamallet e gaou da vezañ treitour dre ma chome feal d'e feiz katolik e voe krouget ha diframmet war urzh ar roue Charlez II a Vro-Saoz.
- E Breizh, er VIIvet kantved, sant Molvan, eskob Gwened. Marteze e voe ganet e hanternoz enez Vreizh. Bet eo bet penitiour e Klegereg nepell diouzh bourc'h Sant-Inan, ganet ivez e hanternoz enez Vreizh. En e chapel e Klegereg e tiskouezer e arched-maen.
- Sant Kuvan pe Kufan, beleg penitiour e Kernev.
- Sant Dalbhach, manac'h en Iwerzhon.
- War-dro 660, santez Sira (Gl. Syre), abadez. Hag hi c'hoar sant Fiakr, e voe degemeret a-gevret gantañ e Melda gant an eskob sant Faron hag ez eas hi da vanac'hez er manati diazezet gant santez Fare c'hoar an eskob e Faremoutiers. Da c'houde e voe abadez e Châlons-sur-Marne da vare an eskob Ragnebaud. Darn eus he relegoù a veze miret en iliz Sant-Merry e Pariz.

D'ar 24 a viz Here

- E lec'hioù zo sant Rafael arc'hael. Er Bibl Santel, e Levr Tobit en em ro da anaout d'e warezed pa lavar: « Me eo Rafael, eus ar seizh ael en em zalc'h hag a zeu dirak klod an Aotrou. » (12:15) E anv o talvezout « Doue a barea » a zo ennañ kemenn e gefridi evit an denion ma teu d'o gwareziñ en o droukverzh. Enskrivet eo bet en deiziataer hollvedel gant ar pab Benead XV e 1921 ha tennet dioutañ e 1969 evit bezañ lidet war un dro gant sant Mikael ha sant Gabriel d'an 29 a viz Gwengolo. Lidet e veze e Kemper kerkent hag an XIXvet kantved (kv. Misal 1863).
- Er bloaz 576, distro da Zoue sant Seneg pe Senoch, beleg penitiour. Ganet e Tiffauges er Poatev, eus poblad an dTaifaled e stalias e beniti war rivinoù ur chapel bet savet gant sant Varzhin. Pa varvas e voe gouelet gant un engroez a beorion a veze sikouret gantañ evit o c'horfoù hag o eneoù.
- E 646, sant Yann an Oan, eskob Tongres. Edo o terc'hel un domani e-kichen Huy pa voe dibabet evit bezañ eskob Tongres, Maastricht ha Luik. Reiñ a reas degemer d'an Iwerzhonad sant Monon.
- E 1870, sant Anton-Mari Claret, eskob Santiago Kouba, genidik a Vro-kGatalonia diazezour kongredadur misionel Kalon Dinamm Mari lesanvet ar Glaretined. D'e zaou vloaz warn ugent ez eas d'ar c'hloerdi hag ur wezh beleget e kanttreas e-pad bloavezhioù dre gKatalonia o prezeg d'ar bobl hag o tasparzhañ kraflevrioù kenteliañ moulllet gantañ. Diuzet da eskob Santiago Kouba e 1850, e voe da gentañ holl prederiet gant salvidigezh an eneoù hag evit se e lakaas c'hoazh da voullañ skeudennoù ha kraflevrioù. Kofezour ar rouanez Izabel II e voe skarzhet e tec'has a-gevret ganti e-pad dispac'h 1870 hag e echuas e vuhez e Bro-C'Hall en abati kisterkiat Fontfroide.
- E Breizh, e deroù ar VIIvet kantved, Malor pe Maelor (Lt. Maglorius), eskob abad e Dol, kenderv ha lerc'hiader sant Samzun, diskibl sant Ildud e Kembre, a roas e zilez evit mont da benitiour e Lec'hon, etre Dinan ha Lanvalae lec'h ma voe enoret sant Mewen, deuet deus manati Dol.
- Er VIvet kantved, sant Varzhin Gwerzhav, abad, diazezour. Ganet e Naoned, diagonal gant sant Felis, e voe arriagon Naoned kent mont da benitiour e koadeg Duvaen e Bro-Rezh ha diazezañ abati Gwerzhav e Bro-Naoned.
- Er VIvet kantved, sant Kadvarc'h (Kb. Cadfarch), VIvet kantved, manac'h gant sant Ildud, breur sant Maezhlù.
- Er Xvet kantved, sant Fromont, manac'h e Redon.
- E 1671 e Gwened, ar bac'hiadez Armaela Nikolaz, matezh e kevrinourez. Ganet e oa e Kempenieg en eskobiezh Sant-Maloù, hag hi merc'h henañ pemp bugel eus un tiegezh kouerion lec'h ma tremenas he bugaleaj gant labourioù an ti hag eveshaat al loened. Pa varvas he zad e voe lakaet e servij ur vaouez eus Ploermael, ha da c'houde ez eas en Arradon, en eskopti Gwened, e servij an tiegezh a Roguedas lec'h ma chomas he buhez-pad. He buhez kevrinel souezhus meurbet a zo bet danevellet gant al leanez Jeanne de la Nativité eus manati Ursuladezed Gwened hag gant ur manac'h beneadat eus Naoned.
- Lec'h ma vo lidet antronoz: Gousperoù kentañ an Dedi.

D'ar 25 a viz Here

- Gouel Dedi an Ilizoù kensakret ha n'anavezzer ket deiz o dedi (a c'heller lidañ da Sul diwezhañ ar miz-mañ). Hon ilizoù savet gant mein zo anezho arouez Iliz Doue a zo ar C'hrist e-unan ar maen-korn ha ma'z omp-ni ar vein bev anezhi. Bez' ez eo an ti pediñ gwirion, neved klod Doue, ar pried bet prenet gant ar C'hrist diouzh priz e wad, a vez bevaet gant e Spered ha ma vezomp ganet enni d'ur vuhez nevez ha trafadel.
- War-dro 205, da vare heskinadeg Decius, e Firenze e Toscana, merzherenti sant Miniad pe Minias, milour armeniat a orin. Ur wezh dibennet e krogas en e benn hag e treuzas an Arno betek an dorgenn lec'h m'emañ an iliz lec'h m'emañ e vez.
- E 287, e Roma, merzherenti sant Chrysant ha santez Daria. Ganet e oa Chrysant en Egipt, mab d'ur senedour roman. Gantañ e teuas da Roma lec'h ma teuas da vezañ kristen. Dimezet e voe gant Daria, ur vestalenn anezhi, a voe kanttroet gant Chrysant. Divizout a rejont chom en diweirded hag

e krogjont da reiñ testeni d'ar C'hrist tro dro dezho, kement ha ma voe kalz kanttroidigezhioù. Goude meur a voureviadur e voent douaret o-daou ez vev.

- E 304, e Roma, merzherenti sant Marsellin, pab. Diuzet e 296, e voe merzheriet da vare heskinadeg Diocletianus a voe ken kriz ma chomas vak sez Roma e-pad pevar bloaz. Douaraet e voe e bered Priscillia war hent meur Salaria. E relegoù a voe roet e 848 da sant Konvoion evit abati Redon ha Nevenoe a yeas en arbenn dezho e Baen.

- War-dro 410, sant Gaodeñz (Gl. Gaudence), eskob Brescia e Lombardia, bet urzhiet gant sant Ambroaz, heverk dre e gelennadurezh hag e vertuzioù. E Breizh ez eo patrom iliz Pleaol.

- Daou ugent merzher eus Bro-Saoz ha Bro-Gembre bet lakaet d'ar marv etre 1535 ha 1679 en abeg d'o fealded ouzh an Iliz Katolik Roman ha dre ma nac'hent entuañ gant disrann roue Bro-Saoz. Eus Kembre e oa sant Rhisiart Gwyn, sant Ioan Jones, O.F.M., sant Ioan Roberts, O.S.B., sant Philip Evans, S.J., sant Ioan Llwyd, sant Dafydd Lewis, S.J.

- E Breizh, er VIIvet kantved, sant Goueznou (Gwezeg pe Tewezeg, Lt. Woednovius, Gg. Gouesnou), eskob-abad e Leon. Penitiour e Lanweznou hiziv parrez Gouenou, mab sant Tudon, breur sant Madian ha santez Tudonia, ha keneil sant Paul Aorelian e oa. A-raok 1969 e veze lidet war un dro gant sant Kled d'ar 26 a viz Ebrel.

- E Breizh, sant Bozkad, eskob e Kernev, paeron iliz parrez Trêgad er Vro-Vigouden.

- En Iwerzhon, sant Gorman, manac'h e Cill Ghormáin e bro Laighean (Leinster).

